

# Bugaleaj Nevez

Gilles Servat (droits réservés)

C'hwi eo, c'hwi eo bugaleaj nevez  
Ur vamm gozh  
C'hwi eo, c'hwi eo kanenn un deiz nevez  
Gant an noz vras ganet

C'hwi eo frouezh yaouank ur wezenn wenn ha du  
C'hwi eo mouezh un evn diwanet 'barzh e ludu  
Pa 'n em rog an oabl ez oc'h gwad ar goulou  
Pa n'em zigor an nor ez oc'h avel ar frankizoù

Diskan

C'hwi eo blaz ar vro e bleunioù an harlu  
C'hwi eo flamm Beltan en deizioù kentañ 'viz Du  
War mor an dazont ez oc'h staon ar vuhez  
Ha war fraostoù ar maezioù ez oc'h ar gwinizh dic'hortoz

Diskan (*bis*)

*Vous êtes l'enfance nouvelle  
D'une grand-mère  
Le chant d'un jour nouveau  
Enfanté par la grande nuit*

*Vous êtes le jeune fruit d'un arbre noir et blanc  
Vous êtes la voix d'un oiseau germé de ses cendres  
Quand le ciel se déchire vous êtes le sang de la lumière  
Quand s'ouvre la porte vous êtes le vent des libertés*

*Vous êtes le goût du pays dans les fleurs de l'exil  
Vous êtes la flamme de mai allumée en novembre  
Sur l'océan de l'avenir vous êtes l'étrave de la vie  
Et sur les friches des champs vous êtes le blé inattendu*

À tous les élèves de toutes les classes bilingues, en Bretagne comme ailleurs.